

Court Métrange

FESTIVAL INTERNATIONAL DE RENNES

Premier Prix Critique sur court Lycée en Breton
Derwell Drapier 1añS1 lise Jean Macé Roazhon

Dañjer an aon evit ur boblañs : pe darfell hollek

« Cólera » zo ur film-berr spagnol eus 6 munut 16. Skrivet ha savet eo bet gant Aritz Moreno e 2013 (diwar un istor skrivet gant Bruce Jones). Awenet eo an istor gant fedoù gwirion, hini ur gêriadenn diouennet gant ur c'hleñved-red, ar c'holera. Ur film-berr en ur talenn-sekañs hepken eo.

E penn kentañ ar film e vez gwelet un den gant ur fuzuilh hag a-dreñv dezhañ ur strollad tud fuloret ha armet gant bizhier ha ferc'hier. Seblañt a reont bezañ peizanted. Erruout a reont dirak ur gabanenn graet gant tammoù koad, kartoñs ha plastek. Ar paotr gant ar fuzuilh a c'halv e annez. Kregiñ a reont da gunujenniñ anezhañ, d'ober bosennour anezhañ. Kuitat a ra dousig e loch. Ha gwelet e vez un den klañv, lous ha tort gant gwerbloù, heñvel ouzh un euzhvil. Ar beizanted a gelc'hia anezhañ hag ur plac'h vihan a daol ur maen outañ. Ar c'hlañvour a grog da redek hag an den armet a vuk e fuzuilh outañ hag e ziskar, kouezhañ a ra en ur poull ha tout an dud ya kuit. Ar plac'hig a ya da welet. Marv eo ar bosennour, an dour o vont ruz gant e gwad. Er fin e vez diskouezet ar bloueziz o vont kuit hag ar banell « mirlec'h dour-kêr ». Ar c'holera zo ur c'hleñved tagus-kenañ. Stekiñ a ra ar vugale kement hag an dud gour, gallout a reer mervel gantañ e korf un nebeut eurvezhioù.

Ar c'holera zo ur pore foerellek lemm a zeu gantañ un dizourennañ strizh, ha hep prederiadur e c'hell disoc'hiñ ar marv. Tapet e vez en ur lonkañ boued pe dour louset gant ar vazhell *vibrio cholerae*. Gant ar berr m'eo ar prantad goradur, etre div eurvez ha pemp devezh, eo seul greñvoc'h red ar c'hleñved. Sellet vez ouzh ar c'hleñved-se evel unan bosennus (a zo gantañ doareoù ar vosenn pe ur c'hleñved-red all uhel e feur mervel. Terzhienn vosennus, kement terzhienn ma teu diwarni chardonsoù, gwerbloù).

Arouezioù ar c'holera na glotont ket gant re ar c'hlañvour, an titl a zamveneg kentoc'h fulor ar bloueziz neuze. Ar c'hlañvour zo tapet kentoc'h gant un doare bosenn, setu perak eo graet outañ bosennour. C'hwezet eo ar c'hleñved kement ha ken bihan ma tenn ar bosennour ouzh un euzhvil.

Un troc'h a zo etre ar bloueziz emañ an tu kreñv ganto, niverus anezho hag oc'h ober ur c'helc'h, hag ar bosennour e-unan ha kelc'hiet. E gunujenniñ a ra ar bloueziz, eñ ne lavar grik, gouzout a ra e vo lazhet ha gallout a reomp soñjal e oa engortoz eus se.

E deroù ar sekañs bez ez eus un dalenn vras war an den armet (stabil eo ar c'hamera) ha war an eil talenn ar beizanted, kement-se a ro da santout o mennerezh, o fulor, o nerzh.

Goude e teu an dalenn vras war ar bosennour ha bepred ar beizanted en eil talenn, dre se omp lakaet en e blas (en e benn emaomp). Reiñ a ra an tu da welet an traoù eus savpoent ar gouzañvat.

Goude e vez gwelet ar plac'hig oc'h erruout dre a-dreñv hag ar maen ha kevout a reomp c'hwitellat en e benn ar pezh a lak muioc'h c'hoazh ar seller en e blas ha pa vez o redek ar c'hamera a heuilh anezhañ met distabil eo, ar pezh a ro da grediñ er spont.

Ar plac'hig gant e sae gwenn a daolenn ar glanded, an dinamded, breinet gant an darfell hollek-se. Pa 'z eus un enkadenn e tro an aon da gasoni.

Ar mousgoap er film berr-se a ziver eus o c'hoant da wareziñ ar gumuniezh en deus kaset anezho da lazhañ ar pezh a welent evel ur gourdrouz, ha dre-se o deus kondaonet o c'hêriadenn, ha diskouez a ra mat e c'hell an aon kas d'ober traoù sot-nay.

Ar film berr-se a ziskouez hon oberoù o deus atav heuliadoù hag e rankomp teurel evezh ouzh an efed strollad. Ha na pas en em heuliañ an eil re ar re all.

En ur gouezhañ er mirlec'h en deus kontammet tout an dour ha dre ma 'n em led ar viruz dre ar genoù omp sur e vo diouennet ar kêriadenn en he fezh.

An neubeut a efedoù arbennik a ra d'ar film bezañ realour.

Nevez zo ez eus bet un istor damheñvel : « A ballajah, au nord est du liberia une femme et sa fille ont été

cloîtrées dans leur maison parce qu'elles étaient atteintes par le virus Ebola. Fatu Sherrif, 12 ans a été emmurée vivante pendant une semaine entière avec le corps de sa mère, « sans nourriture ni eau », avant de mourir à son tour. » *le Parisien 13/08/2014.*

Gant ar film berr-se e vez taolennet ar gudenn a heuilh : aberzhiñ un hinienn evit gwareziñ an holl. Pelloc'h e kas ar film-se d'ar pezh a lâre Charles Darwin : « Notre instinct de sympathie nous pousse à secourir les malheureux [...]. Nous ne saurions restreindre notre sympathie, en admettant même que l'inflexible raison nous en fit une loi, sans porter préjudice à la plus noble partie de notre nature » « *La descendance de l'homme* » 1871 (chapitre 5 p 145), troet gant Edmond Barbier .

Cólera en deus plijet din rak kavet em eus anezhañ dedennus gant menozhioù talvoudus ha diskouezet mat. Ar film zo berr tre evit ur film-berr, gant ul lusk fonnus a-walc'h ha degas a ra kalz a brederiadennoù. Erbediñ a rafen anezhañ.